

✽ 11 ✽

Selaouit c'hoas eur beden,
O Guerc'hez biniguet !
Plijet ganeoc'h rei souten
D'ar Frans hor bro-garet.
Grit ma vo peoc'h, karantez
Etre ar Francisien,
Hag adarre dienkrez
Ar Frans a vo christen !

✽ 12 ✽

Dreist oll, ô Guerc'hez santel,
Ni ho ped a galon,
Da viret en Breiz-Izel
Ar guir relijion.
Gant gras Doue ni zalc'ho
D'an Iliz, d'hor c'hreden,
D'hon Tad santel ni vezo
Fidel da virviken !

Kalon sacr a JESUS, ho pet truez ouzomp !
Kalon pur a VARI, pedit evidomp !

VU ET APPROUVÉ :

Quimper, le 27 Juillet 1873.

J. JÉGOU,

Vicaire.

Propriété de l'Éditeur,

J. H.

1875. — Moulet e Montroulez, e ty J. Hasté. — 712

1-2-063 Herbaux

KANTIK

EVIT

PELERINACH ITRON VARI AR SALET

E KICHEN MONTROULEZ

AR 7 A VENGOLLO 1873

Var don : *Kantik Breuzie ar Feiz.*
Hag ive var don : *Santez Mari.*

Diskan :

Kassit, Mam garantezuz,
Kassit hor pedennou,
Bete kalon sacr JESUS,
Hag ive hon daelou.
Nouc'h ket galvet hep reson :
« REFUCH AR BEC'HERIEN ! »
Dreizoc'h hor bezo pardon,
Dreizoc'h ni er goulen.

✽ 1 ✽

En ho foan ar vugale
Da glask ho mam a red,
Ha kerkent em'int pare
M'a o deus hi kavet.
D'ho mam hep aoun nag enkrez
E kountont ho foaniou ;
Sur hint eus he madelez,
Sec'ha 'rai ho daelou.

✽ 2 ✽

M'ar hon eus poan ha glac'har
Sonjomp en deus JESUS
Roet deomp var ar c'halvar
Eur Vam drugarezuz.
Ar Vam-ze eo ar Verc'hez,
Ar guella Mam a oue
Eur Vam leun a vadelez
Evel he Map-Doue.



* 3 *

Pedomp eta gant fizians
Hor Mam, hon Rouanez,
Galvet eo : « HON ESPERANS,
« HON DOUSDER, HOR BUEZ. »
Bischoas den var an douar
MARI n'en deus pedet,
Sant Bernard eo el lavar,
Na ve bet selaouet.

* 4 *

MARI, eus tenzor JESUS
C'hui oc'heus an alc'hoez ;
Bezit ouzomp truezuz,
Sellit hor paourentez !
Allas ! dre hor pec'hejou
Hon eus varnomp tennet
Ar goalenier, ar reuziou
Ho poa deomp annonset.

* 5 *

Great ho p'oa deomp gourdrizou
Var menez ar Salet ;
Mes, siouas ! ho kuzulio
Ni hon eus disprijet.
Ar suliou hag ar gouelio
Dre oll zo profanet ;
Er c'hæriou, var ar mæziou
Doue zo blasphemet.

* 6 *

Ni fell deomp hiviziken
Renons d'ar blasphemou,
Karet Doue, he lezen,
Miret mad ar suliou.
Hogen hep hoc'h assistans
Petra raimp-ni, Guerc'hez ?
C'hui vezo hon esperans
En hor sempladurez.

* 7 *

Guelit ar brezel iskiz
A ra Satan hirio,
D'hor Mam santel an Iliz,
E Rom hag e pep bro.
Ar Pap, kollet he stadou,
Zo dalc'het prisonnier,
O c'hedal he chadennou
Evel guechall Sant Per.

* 8 *

An dud difeiz, digreden,
Ho deveus lavaret :
« Da JESUS ha d'he lezen,
» Brezel, brezel hepret.
» Pe seurt ezom, — emez-ho, —
» Hon eus-ni a Zoué ?
» Hep Doue ni a vevo
» Hag hep ar Pap ive. »

* 9 *

D'an dud-ze, GUERC'HEZ-VARI,
Obtenit sklerijen
D'anaout ho ingratiri,
Ha d'ober pinijen.
Dre ho kalloud burzuduz
Er bed oc'heus mouget
Kalz kredennou binimus,
Kredennou miliget !

* 10 *

O MARI ! bezit skoazel
An Iliz catholik,
Ha roit d'hon Tad santel
Hirio ken reuzeudik
An nerz-kalon, ar frankiz
Dez-ha ken necesser,
Evit gouarn an Iliz,
Evel meo he zever.